

An heur a sko...

Poésie de

F. JAFFRENOU TALDIR

Musique de

Jean Le FLEM LARVOR

CHANT

PIANO

Allegretto Mod^{to}

espressivo

ad lib.

An heur a sko gant he mor-zo-lik lem War gro-gen sklent

Dolce

ad lib.

ar bandu-len a-rem: Ar Micherour a lamndiouz e we-le

rall.

Hag a ro pok d'e wreg, d'e vu - - ga - le.

ped. *p.* *

Più vivo

Eur banac'h tan... eur vo - len gafe rouz Ha prim - er maez,

sva---

Più vivo

dre ar we - no - jen louz, Rag an Dever a c'hortoz a -

crescendo

rall.

- ne - zan; Redeo go nid ar ba - ra da gen - tan.

rall. *pressez*

a T^o $\frac{3}{8}$ 2^e COUPLET.

8^{va} *rall.* *a T^o* $\frac{3}{8}$ * 5^e COUPLET POUR FINIR

* POUR FINIR (5^e COUPLET) *ad lib.*

Hag a zon c'hoaz e vunut di - ve - za.

pressez

en dehors *allarg.* *pp* *FIN*

pp *And.*

AN HEUR A SKO...

Da BAHON-RAULT, RENNES.

An heur a sko gant he morzolik lem
War grogen sklent ar bandulen arem:
Ar Micherour a lamm diouz e wele
Hag a ro pok d'e wreg, d'e vugale.
Eur bannac'h tan...eur volengafe rouz
Ha prim er maez, dre ar wenojen louz,
Rag an Dever a c'hortoz anezan;
Red eo gonid ar bara da gentan.

An heur a sko gant he morzolik lem
War grogen sklent ar bandulen arem:
Hag ar bugel a bak e gaïerou,
E leorigou, e blun, e zeveuriou.
Prim a-le-ma! Sonet ec'h eo ar c'hloc'h,
Demp da c'hoari, da grapat garz haroc'h!
Pa zon an heur euz an diduamant
Ez eo lawen ar vugaligou drant.

An heur a sko gant he morzolik lem
War grogen sklent ar bandulem arem:
Hag en tour braz ar c'hleier groz a vrall
Evid gervel ar c'hristen didamall.
An oferen a dint ebarz an aër,
Sethu an heur da veuli ar C'Hrouer,
Hag ar bobl fur evid heuil ar c'hizkoz,
A zaoulin c'hoaz en iliz ar barroz.

An heur a sko gant he morzolik lem
War grogen sklent ar bandulem arem:
An noz a gouez war ar maeziou didrouz,
War e vrantik eo kludet al lapouz.
An den ive a bign en e wele
Evid renoz beteg tarz ar beure.
Goude labour, skuizder, ha kalonad.
An heur da vond da gousked a zo mad.

An heur a sko gant he morzolik lem
War grogen sklent ar bandulen arem:
Pa' neuz klevet, ar C'hlanvour a lavar:
—“Sethu ma heur da guitât an douar...”
Flam e vuez a daol c'hoaz eur fulen
Hag ar paour kez a c'hoarz d'ar bandulen
Sonet ganthi e zigouez er bed-ma
Hag a zon c'hoaz e vunut diveza. (Bis)

9 a viz Gouere 1914

L' HEURE FRAPPE...

A Bahon-Rault, Rennes.

L'heure frappe de son petit marteau pointu sur la conque sonore de la pendule de bronze: l'ouvrier saute du lit, embrasse sa femme et ses enfants; il allume son feu... un bol de café roux et vite dehors par les sentiers fan-geux, car le Devoir l'appelle; il fruit d'abord gagner le pain.

L'heure frappe de son petit marteau pointu sur la conque sonore de la pendule de bronze; et l'enfant ramasse ses cahiers, ses livres, sa plume, ses devoirs. Vite hors d'ici! La cloche sonne, allons jouer, grimper la lus et rochers! Quand sonne l'heure de la récréation les enfants pétulants sont joyeux.

L'heure frappe de son petit marteau pointu sur la conque sonore de la pendule de bronze; et dans la grande tour, les grosses cloches carillonnent appelant le chrétien pratiquant. La messe tinte dans l'azur, voici l'heure de célébrer le Créateur, et tout un peuple fidèle, pour suivre la tradition, s'agenouille dans l'église de la paroisse.

L'heure frappe de son petit marteau pointu sur la conque sonore de la pendule de bronze; la nuit tombe sur la campagne paisible, sur sa branche est niché l'oiseau. L'homme aussi monte dans son lit pour se reposer jusqu'à l'aube. Après le travail, la fatigue, la douleur, l'heure de dormir est bonne.

L'heure frappe de son petit marteau pointu sur la conque sonore de la pendule de bronze. Quand il l'entend le malade dit:—“Voici l'heure de quitter la terre...” La flamme de la vie jette encore une lueur, puis le pauvre sourit à la pendule qui a sonné sa venue dans ce monde et qui sonne encore sa minute dernière.

9 Juillet 1914